

Boch Kapout !

**Ton-koroll
ha kan-bale**

Dédié par l'auteur
à la Famille TROMELIN,
de Plouguin (Finistère),
modèle de résistance à l'occupation
allemande.

MOUVEMENT DE GAVOTTE

PAROLES & MUSIQUE DE F. FALCO

AN AL-MAN-TED, TUD DEBOELL, LEUN O FENN GANT, A-VEL,
A ZON-JAS EO AR BRE-ZEL 'RA-FE D'O BRO SE-VEL;
ER BLOA-VEZ TRI HA TREGONT D'AR BED HOLL E . REONT SPONT,
HITLER A'ZO MESTR WARNO, PLOU A STOURMO OUTO ?
PLOU A STOURMO OU-to? - ECHU AN ABA-DENN,
BOCH KAPOUT ! KOLLET AR RIBOTADENN GANTO .
TOUT (BIS) ... GANTO TOUT !

I

An Almanted, tud diboell,
Leun o fenn gant avel,
A zonjas eo ar brezel
'Rafe d'o bro sevel,
Er bloavez tri ha tregont
D'ar bed holl e reont spont :
Hitler a zo mestr warno,
Piou a stourmo outo ?

(bis)

II

« Ni a rank chom heb amann
Hag ober kof moan
Ha labourat heb ehan
'Vit trec'hi en emgann.
Hon armou a zigaso
Pinvidigez er vro. »
Setu menozioù kempenn
Laer bras Berchtesgaden

(bis)

Diskan :

Echu an abadenn,
Boch kapout !
Kollet ar ribotadenn
Ganto tout !

} bis

Troit, mar plich

III

Neuze holl, bihan ha bras,
 En Almagn 'labouras,
 A lac'h korf, epad c'houec'h vloas,
 Bevet fall, en noas ;
 Pa voe prest an holl armou,
 Lemmet an ostilhou :
 « *Ha breman, eme Hitler,*
It ha roit d'ezo ler ». (bis)

IV

Ar Boched, o tont er vro,
 A oa paotred faro :
 An tan a rede ganto,
 An drailh hag ar maro...
 Kirri-nij a vilherou
 Azioc'h hor pennou,
 Kamiounou ha tankou
 Eleiz war hon hentchou, (bis)

V

Niverus evel gwenan,
 Tud Hitler-ar-forban,
 Soun en o c'hirri dre-dan
 Ha ruz-tan o c'hraban,
 Goude beza diskaret
 Holl nerz hor soudarded,
 Lorc'h enno, a ziskweze
 D'eomp ar brasa fae. (bis)

VI

Ar Frans n'oa mui, 'petrata !
 Nemet bro a netra,
 A veac'h mat da zervicha
 Ha da bourchas bara,
 Champagn, amann, patatez,
 Ougnoun, kaol, chalotez,
 Da vestr an Europ Nevez :
 « *Deutschland über alles !* » (bis)

VII

Pevar bloaz o deus bevet
 War hor bro mac'hagnet,
 'Vel eur vandenn loëned
 Hon traou o deus lonket :
 Amann zrebent gant al loa,
 Yer, liou, gidoun o doa,
 Bier, viou a zouennou,
 Cognac a litrajou. (bis)

VIII

Merc'hedigou, digalon
 En eun doare eston,
 A zanse ar « *Charleston* »
 Hag a eve boeson
 Gant ar Boched divalo,
 C'houez ar gouez ganto,
 Toun o fri, drouk o sellou,
 Met leun o godellou. (bis)

IX

« An abadenn, emezo,
 Hir amzer a bado :
 Epad mil bloas pe wardro
 Er Frans ni a jomo,
 Hitler deus e lavaret,
 Hag Hitler 'zo profet,
 War moger an Atlantik
 Ar Saozon a ray « *Kouik !* » (bis)

X

Eur wech skilfou ar gaouen
 Sanket en e c'hroc'hen,
 Ne c'hell mui al logodenn
 Nemet maga anken ;
 Evelse, Frans, diwadet
 Gant kleze ar pec'hed,
 'Vit terri da chadennou
 Oa re zempl da vemprou. (bis)

XI

Gant an amzer goulskoude
 Ar Boched a golle,
 Muioc'h mui, dre c'hras Doue,
 An avel a droe,
 Ha d'ar c'houec'h a vezeven
 Pevar ha daou ugent
 Ar voger a voe toullet
 Gant leun a zoudarded. (bis)

XII

En Normandi douaret,
 Ar Saozon kounnaret
 Hag an Americaned
 Gant o c'hirri blendet
 A daolas ar Boch d'an traon,
 Hel lakas d'ober kaon
 Da varadoz an douar
 A golle gant glac'har (bis)

XIII

Fransizien, selaout 'ta
 Ar gentel da denna :
 Koll, ar vro binvidika,
 Ar bobl ar vrudeta,
 Ma n'o deus er stourmajou,
 Dre faot ar priejou,
 Nemet eur c'hoz penner fall
 Ouz daouzek en tu all. (bis)

XIV

Awalc'h a dud 'zo lazet,
 A geriou diskaret ;
 Goude labour ar c'hoazed,
 Deut hini ar merc'hed ;
 Stourm a ranko ar gwraez
 War dachenn ar vuhez :
 Goude brezel an tankou,
 Brezel ar c'havellou. (bis)

F. FALCO